

LENNERIEN

Dek anv a zo dija war roll ar goumananterien a resevo nivniv. 2 & 3 dielloù ar Framm Keltiek. Chom a ra c'hoazh un toullad da reiñ (d'an 50 koumananter kentañ evit ur bloaz). Kaset e vo da bep hini pa vo leun ar roll.

AN AMZER

Kazetenn sizhuniek

Yougoslavia

MARV TITO**HAG AMZER DA ZONT
AR BALKANIOÙ**

Un henistor n'eo ket heni Yougoslavia. Ar vro-mañ ne oa bet anezhi biskoazh a-raok 1918 ha zoken 1931, bloavezh ma oa bet graet Yougoslavia eus unaniez ar rouantezhioù kozh lec'hiet e Kornog ledenez ar Balkanioù. Hogen, betek diwezh an eil brezel-bed, harzoù a bep seurt a zo bet gant ar vro yaouank. Ur vro graet a-ratozh hag a-dammoù eo eta, ha Tito an heni eo en doa graet anezhi, goustadik, a-hed ar bloavezhioù, daoust d'he dishevellderioù. Bremañ ma 'z eo marv Tito, petra a zeuio da vezañ Yougoslavia, kalz kudennoù ganti?

Da gentañ kudennoù diabarzh, war an dachenn relijiel da skouer, peogwir teir c'hraev (relijion) a vez graet diouto war an holl diriegezh; evit ar pezh a sell ouzh kudenn ar yezhoù, e ouzer ez eus peder yezh ofisiel e-barzh ar vro met ar serbeg hag ar c'hroateg a vez aliesoc'h gant an dud eget ar yezhoù all. Ma taoler ur sell ouzh an ekonomiezh, e verzer ez eo kalz pinvidik-oc'h Serbia ha Kroatia eget ar republikoù all, neozh, daoust da-se, bez eze eus atav eus an eneberezh istorel etre ar Serbed hag ar C'hroateg. Da eil, kudennoù diavaez gant an Unvaniezh Soviedel, o vezañ ma vez houmañ a-viskoazh o klask renkañ Yougoslavia a-nevez e-barzh politikerezh

**Manifestadegoù
e Naoned**

Naoned.- Manifestadegoù bras e Naoned, ar sizhun dremenet, gant paotred al legumachoù, deuet eus kement korn a zo e Breizh, evit klemm dre m'eo aet priz o c'henderc'hadoù d'an traoñ abalamour d'ar re o tont eus broioù all. Ar pezh a vir ouzh gounezadurioù ar vro da vezañ gwerzhet. Trubuilhoù a zo bet war an hentou-bras tro-dro d'ar gêrbenn gozh ha dreist-holl er marc'hallac'h "broadel" e-lec'h ma 'z eus bet distrujet legumachoù e-leizh o tont eus broioù ar C'hreisteiz.

Moskva, abaoe ma oa bet lakaet ar vro war hent ur sokialegezh giz Tito, heni an emvererezh blaz al libéralegezh ganti. N'eo ket mat an darempredoù kennebeut gant Bulgaria pa ouzer ez eo Makedonia, douar bulgariat anezhañ, unan eus republikoù Yougoslavia.

Tito ne voe ket hepken o ren Yougoslavia, tad ar vro an heni e voe, hag arouez ar riezioù "disteud" nemetañ war un dro, hag en abeg da-se, dazont Yougoslavia n'eo ket an heni a zo koulz tev o tont war e du met ivez heni ar bed a-bezh. Tremen a raint e-biou deomp emichañs, ret eo bezañ war evezh.

P.K.

SKOUER B PLOGO

A-ZO E SPERED

TUD AR PIRC'HIRIN

Naoned.- Abaoe m'eo bet lavaret gant pennoù bras ar stad e vefe un dra vat sevel un atomva er Pirc'hirin, n'o deus gwelet tud ar barrez orjalenn dreinek ebet, na dourterez, na netra. N'eus ket a zouaroù war anv EDF c'hoazh, daoust dezhi bezañ aet d'ar gouerien dre gaer. Ar wech gentañ eo e vez gortozet ken pell. A-wechoù, zoken, kroget o deus gant al labourioù a-raok ma vo roet an aotre da sevel.

Evel ma weler, nec'het e vez ar Stad pa vez an dud oc'h en em gannañ start. Arabat krediñ avat ez eo echu an traoù. Ar re a zo aet ganto a fell dezho grañs ma vo kaset o raktresoù da benn, hag harpet e vezont

gant tud 'zo, mevelien ar Stad anezho, evel renerien Kambri Kenwerzh Naoned a zo a-du gant ar vistri; n'eo ket ar werin a viro ouzh o zaol da zont ganto.

Hervez, divizet e vo an traoù e-kerz an hañv (mare ar vakansoù eveljust). Ar re a zo ar galloud ganto a gav dezho marteze e vo aet skuizh an dud ac'han di. Hogen e-pad gouel ar c'hK.L.K.N., disul tremenet, diskouezet o deus annezidi kanton Ar Pirc'hirin ne laoskint ket o douar da vervel, dreistholl bremañ m'emañ skouer bPlogo e-barzh o speredoù.

P.K.

*ar galloud.

GOUEL AR BREZHONEGaozet gant Skol an Emsav ha Diwan
ROLL AN ARVESTOU

- **SADORN 10: C'HOARIVA** strollad karaez
- **MERC'HER 14: BEILHADEG** kemener, an triskell, naig rozmor, n. cabon, h.a.
- **YAOU 15: DEVEZH DIWAN festoù-noz** (S.O. AN AMZER 22102180)
- **GWENER 16: goude lein FILMOÙ, SAVADENNOÙ** diouzh an noz **C'HOARIVA** strollad plougin
- **SADORN 17: goude lein KANAOUENNOÙ gwendall, ewen - 7e00 PRED YEN - 8e00 C'HOARIVA** strollad ar vro bagan - 10e30 **FEST-NOZ**
- **SUL 18: KERMES, KANAOUENNOÙ BUGALE gwalarn, k. noges; GOUREN, DISKOUZADEGOÙ, H.A.**

PLABENNEG

14-18 MAE 1980

Ar C'helaouennerezh Brezhonek Nevez

"bremañ"

Ar wech-mañ e stlenomp deoc'h ar gelaouenn Bremañ, a zo hini Skol an Emsav.

Boazet omp da lenn kelaouennoù a vent vihan, pe a vent etre. Ar wech kentañ em eus bet BREMAN niv. O etre va daouarn ez on bet souezhet, ken bras eo. Ment ar c'helaouennoù pemdeziek eo hini ar gelaouenn.

C'hwec'h pajenn ez eus en niverenn gentañ hag an danvez anezho Plogo, Manifestadeg an TSAB e Montroulez, Gouel ar Brezhoneg, ha diskleriadurioù diwarbenn S.A.E.. Luc'h-skeudennoù bras a vez kavet e-barzh.

Diaes eo barnañ ur gelaouenn pa ne vez embannet nemet an niverenn 0 anezhi. Setu avat dre vras un nebeut evezhiadennoù em eus savet a-feur m'am eus lennet BREMAN:

-dudius eo ar pennadoù, dreistholl an hini savet gant Jil Killivere a-zivout emgann tud Plogo a-enep da archerien ar Stad, a-enep da sevel ar greizenn derc'hanel.

-Ar yezh a zo eeun, ar gerioù hag an droioù lavar aes da gompren evit n'eus forzh piv a vez boazet da lenn brezhoneg ar pemdez.

-Un tamm c'hwitet eo koulskoude, a gav din, an dresadenn war ar bajenn gentañ: gant mil boan eo em eus lennet ar ger "PLOGO". Met n'eo ket kalz a draoù eveljust...

Plijus eo ar gelaouenn, ha n'eus nemet un draig a gavan e vefe mat cheñch: dont a ra er-maez bep eil miz, re nebeut eo marteze. Mat e vefe da vBREMAN dont er-maez bep miz. Notomp ivez ne goust ket ker ar c'houmanant-bloaz, ar pezh a zo pouezus pa ouzer pegen ker e koust bremañ bezañ koumanantet da holl gelaouennoù brezhonek.

BREMAN

Burevioù: 8 straed Hoche, 35000 Roazhon.
Koumanant-bloaz: 20 lur (reizh), 30 lur (skoazell), 25 lur (broioù estren).
Dont a ra er-maez bep eil miz.

Mankout a ra deomp kenskriverien. Titouroù d'ar gelaouenn. Trugarez!

AN AMZER

2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON
Kelaouenn sizhuniek

Rener ar gelaouenn:
Mark DECAMBOURG

KOUMANANTOU:

6 MIZ (24 niverenn):
Reizh: 36 lur
Studierien, skolidi: 24 lur
Skoazell: 40 lur
9 MIZ (36 niverenn):
Reizh: 48 lur
Studierien, skolidi: 36 lur
Skoazell: 60 lur
12 MIZ (48 niverenn):
Reizh: 72 lur
Studierien, skolidi: 48 lur
Skoazell: 80 lur

KRP(Decambourg):25.97V Roazhon
CPPP 62319

Niver a skouerennoù moulet evit an niverenn-mañ: 1.000

"PA VARV MABDEN, EZ EUS GOURDROUZ A-US D'AL LOENED",

EME TUD APTSD

Lanun.- Kendalc'h an A.P. T.S.D. (Kevredad difenn eoked) a oa e Lanun.

Ul lugan nevez a zo gant difennourien ar stêrioù e Breizh. Ne lavaromp ket mui: "Pa varv ar pesk, ez eus gourdrouz a-us da vabden", met: "Pa varv mabden, ez eus gourdrouz a-us d'al loened". Rak e Bro Leon, an dud ne c'hellont ket ken evañ dour ar stêrioù abalamour d'an nitrat a zo ennañ, ar pezh a ro kleñvedoù da loened korn.

AL LAEZH RE GER

D'ar Meurzh 6 a viz Mae, peizantet e-leizh war hentoù Breizh, evel war hentoù Bro-C'hall. D'al Lun 5 eo an tren o deus lakaet da chom a-sav e-pad daou vunut warn-ugent e porzh-houarn Landerne. Klemm a reont dreistholl abalamour d'an dreistailhoù war al laezh ha da gresk o frejoù.

KELEIER BREIZH

Roazhon.- D'ar Meurzh 6 a viz Mae, an Ao Voisard, rener Quest-Atlantique, en deus displeget kefridi e gevredad, er c'hleub kelaouñ. Fiziañs en deus en amzer da zont ekonomiezh ar rannvro gant ma ouezo renerien an embregerezhioù en em ober diouzh stad an traoù, da lavarout eo gwellaat doare labourat an dud, ha kas trede rann (secteur tertiaire) an ijinerezh war-raok.

LABOUR RAKSTUDI

•Skol Micherioù ar Mor (EAM).- Rakstudioù ganti:
-Tredanerien: etre ar 7 a viz Gouere hag an deiz kentañ a viz Eost.
-Troerien: eil derez, adalek an 21 a viz Gouere betek an 12 a viz Gwengolo.
-Pegerien vetal (soudeurs): eil derez, etre an 23 a viz Mezheven hag an 18 a viz Gouere.
EAM, straed vras Roc'h an Ifern, B.P. 904, Naoned.PG:49.35.05.
•Kevredad Breizh an dud-ren.- 9 straed Sveden, 35100 Roazhon PG:(99)51.71.33.
Kustumm a ra prientiñ rakstudioù, dreistholl evit ar re kollet o labour ganto.

BERR-HA-BERR

•E Naoned en deus an Ao Lacourt-Gayet, isprezidant rann gall ar gompagnonezh Shell, diskleriet eo ret deomp ober mui-oc'h-mui gant ar glaou. Adroomp da c'houzout deoc'h o deus treustoù an eoulmaen ur bern interestoù e-barzh ar glaou.

•Disenglev e Kambr Kenwerzh Aodoù-an-Hanternoz diwarbenn ur gwir porzh war aodoù hanter noz ar vro. An Ao Cornic a gav gwelloc'h Lezardrev, met an Ao Duault a chom a-du evit Al Lege e-kichen Sant-Brieg.

•E Sant-Brieg o deus micherourien ar "Joint Français" kroget gant o zrede miz harzlabour.

•Kendalc'h ar Vretoned harluet en deus roet disul priz Morvan Lebesque da Yann-Vari Kerloc'h (maer Plogo), ha priz Jacques Kerouat da Alan Stivell.

•Aet eo priz Skrivagnerien Breizh gant Naig Rosmor evit he dastumadenn barzhonegou "Karantez ha Karantez".

Pempoull.- Goulenn a ra izili an ti-kêr, a unvouezh, e vefe dieubet an holl vretoned tamallet pe kondaonet gant lezvarn Surentez ar Stad. Fellout a ra dezho e komprenfe ar gouarnamant emzalc'h ar vretoned yaouank-se, skoet ma vezont gant an dilabour, an harlu, diwriennet ouzh o senvadur.

KOUMANANTERIEN

Pa skrivit deomp ha pa roit gwerzh hoc'h adkoumanant, arabat deoc'h disofjal reif ho niverenn goumanant pe kas ur vanderan asambles gant ho paeamant.

Setu penas lenn ho pandenn goumanant:

992R 22

AO M.
2 STRAED L.
35000 ROAZHON

992R: Ho niverenn goumanant.
22: niverenn diwezhañ AN AMZER a vo resevet ganeoc'h.

KENDALC'H KELTIK

Kendalc'h Keltiek 1980 a vo dalc'het en Iwerzhon eus an 23 a viz Gouere d'an 2 a viz Eost e Dulenn.

Er bloaz a zeu e vo eLanun. Un emvod prientiñ a vo dalc'het er sal Savidan e Lanun d'ar 24 a viz Mae da 2eur. Digor eo d'an holl.

SPORTOÙ

ABADENNOU MELLROAD

-Eil rummad:

Kemper 1/1 Tours
Roazhon 1/0 Rouen
Gwengamp 0/1 An Havr Nevez

-Trede rummad:

Sant-Brieg 2/1 US Normandie
ST Brest 1/0 Creil
US Ar Menez 2/3 Poissy
AS Brest 2/3 Chartres

US Konkernev 1/0 CA Lisieux

-Pevare rummad:

Penmarc'h 0/0 Sant-Nazer
Ansiniz 1/3 UCK Gwened
Kemper 0/1 Cholet

Kemperle 1/1 Luçon
Kastell-Paol 2/0 Getigne
PTT Naoned 1/1 Ar Geoteg

Velos Gwened 3/1 Montroulez

-Rummad a enor:

AS Lanester 3/0 AS Plouhineg
Louvain SP 2/0 Sant-Laorant

US Sant-Malo 0/3 US Berne
ST Roazhon 4/1 SO Maine
DC Karazec 1/2 USSC Redon

US Kleder 1/1 ST Lanun

EA Gwengamp 1/2 FC An Oriant

ABADENNOU MELLZORN

CJF Sant-Malo 15/23 Landerne
Saozon-Roazhon 33/16 Gwitreg

ASA An Oriant 27/14 Lesneven
Plougerne 33/14 AL Kemper
CPB Roazhon 22/22 Ar Pillier Ru

FL Keryado 26/30 FL Lanester

ABADENNOU RUGBI

RC Sant-Brieg 27/4 FC Fontenay

en ur ger...

WARDU AN TANIÖ...

Echu eo leuniañ an toulloù war an Taniö. A-benn nebeut e vo kroget gant riboulerezh an eoulmaen betek ar gorre.